



C'HOARIAOUEG BIZIBUL

LIZHER NIV.20

MIZ MEZHEVEN 2014




Serr e vo ar c'hoariaoueg d'ar Sadorn 7 a viz Mezheven 2014.

Digor e vo d'an 11 a viz Mezheven adalek 4e30 g.m., serr e vo diouzh ar mintin.

Nevezentioù miz Mezheven :

WATER LILY

Ur c'hoari Game Works adalek 7 vloaz



Pal ar c'hoari : Merkañ ar muiañ a boentoù e-pad redadeg roueel ar raned ha degouezhout na re abred na re ziwezhat.

Pep c'hoarier a dap ul loa-zour er sac'h evit gouzout pe liv e vo e raned. Evit kas e jedoueroù war-raok e c'hall ur ran ober ul lamm dreist ar c'harzennoù gant ma vo bihanoc'h pe kevatal an niver a garzennoù d'an niver a jedoueroù zo er bern ma yelo kuit diwarnañ. Gallout a reer lakaat raned an eil war eben. Pa vez tizhet ar rikler ez gant ur ran ez a diwar wel e-barzh ar stank. Echuet eo ar bartiad pa'z eo aet an holl raned eus ul liv diwar wel. Kontañ a reer ar poentoù neuze ha ret eo gouzout ne zegas ar ran gentañ nemet ur poent, an eil daou boent...

Ur c'hoari strategiezh ha memor mat-kaer. Ur c'hoari savet gant Dominique EHRHARD, en deus krouet ivez Dixit, Marrakech, tasmant Mac Gregor...

Poher
communauté



Poc'hêr
kumuniezh




C'HOARIAOUEG BIZIBUL

LIZHER NIV.20

MIZ MEZHEVEN 2014

TEÑZOR WAR WEL

Ur c'hoari Haba adalek 5 bloaz



Pal ar c'hoari : Bezañ ar morlaer pe ar vorlaeron o deus tizhet an irc'hier gant ar muiañ a vadoù.

Ur c'hoari chañs ha taktik, ma c'haller stankañ an hent d'ar c'hoarierien all pe bezañ stanket e hent ganto.

Diwallit, leun a skoilhoù a vo war ho hent, ne dalvez ket mont d'ar red !



C'HOARIAOUEG BIZIBUL

LIZHER NIV.20

MIZ MEZHEVEN 2014

THE ISLAND

Ur c'hoari Asmodée adalek 8 vloaz



Pal ar c'hoari :

Kuitaat an enezenn a-raok ma krogfe ar menez-tan da darzhañ ha lakaat e ergerzherien e surentez war an inizi tro-dro. Met diwallit rak naeron-vor, rinkined ha balumed, da lavaret eo loened dañjerusoc'h pe dañjerus, zo o kantren er mor.

Rankout a reot diskouez oc'h paotr pe blac'h ar strategiezh ha bezañ diskorpu! a-benn gounit er c'hoari-se.

Ur c'hemmek etre Dent ar mor, euzhvil al Loc'h Ness ha Moby Dick.

Ur c'hoari dreist, leun a adrenalin hag a suspens.

Leon an aërouant

C'hoari miltamm ramzel Djeco, gant 58 pezh

Adalek 4 bloaz



Poher
communauté



Poc'hêr
kumuniezh



C'HOARIOUEG BIZIBUL

LIZHER NIV.20

MIZ MEZHEVEN 2014

playmobil

Malizennig Morlaer ha Soudard (da amprestañ hepken)



Sae INKA

Ment 6-8 vloaz



Poher
communauté



Poc'hêr
kumuniezh